

YF_0016_Ar Miliner

(Le Bué - Le Hunsec)

(Laridé 8)

- 1 Ma mamm reit din-me mem brozh lin
Tatima dondaine
- 2 Ma mamm reit din-me mem brozh lin
Tatima dondaine
- 1 Ha me yay-me d'ar vilin
Tatima timatima
- 2 Ha me yay-me d'ar vilin
Tatima dondaine

Ma merc'h, ho prozh lin n'ho po ket
Ha d'ar vilin c'hwi nend ahet ket

Mem brozh lin din reet pe ne reet
Mes d'ar vilin 'ma ret monet

Kar me glev ar sonerion
Ar vombard er vilin é son

Kar me glev ar bombarder
E vombardal àr ar chaoser

Bonjour deoc'h-c'hwi miliner mat
Na c'hwi 'valo din men fochad

O ya, plac'hig, malet 'vo deoc'h
Ma laret din p'tra zo genoc'h

Kerc'h segal ha gunec'h tu
Malet 'vo deoc'h ma ve tu

El ma kouezhe ar bleud er sac'h
Ar miliner 'dostae d'ar plac'h

Chomit trankil, ta, miliner
Kar c'hwi 'rego korn men danter

Mar 'bez roget, roget e vo
Kemenerion a zo er vro

Kemenerion a zo er vro
Me m'eus argant ha me 'baeo